

# CANTIQ SPIRITUEL

EN ENOR

## DA SANT LEONARD.

*Voar ton santes Eodet.*

1. Majeste adorabl, sclerdet ar sperejo;  
Curunen an oll-sænt, joaustet an envo,  
Prestet d'in ho silanç, humblamant me' ho ped;  
Evit inorin unan dimeus ho mignonet.

2. Autre sant Leonard, mignon bras da Doue,  
C'hoant am eus d'ho meulin dre eur c'hantiq neve.  
Evit rentin d'ac'h-hu ar gloar hac an inor,  
Hac ar pouerrio hoc'h eus voar douar ha voar vor.

3. C'houi a zo bet ar c'hentan deus ar rouantelez.  
Exempl ha mezellour dimeus ho santelez.  
En Franç e fleurissec'h, voar dro daouzec cant vla,  
Evel eur Moïses pe un Neremia.

4. Comparaget a voe, herve lectur ar scrit;  
Eus Elzas profet, gant justic ha merit;  
Evel un abostol e heo bet distinguet,  
Gant splendeur ha triumph dre bevar c'horn ar bed.

5. Deit voa voar ar bed man deus a extraction nobl,  
Oracl a vouirione hac esperanç ar bobl;  
Eur pontif da Jesus, un doctor d'an Ilis,  
Vertuus ha brillant evel ar fourdelis.

6. Goengampis ha re all dimeus an escopty,  
Deut da glevet canan ar gloar ha melody  
Deus a sant Leonard, hon amez e fidel,  
Quantan patron a m'oamp ebars en Breiz-Izel.

7. En he dy man ar remed deus an oll glenvejo ;  
 Terrieno ha drouc pen , ha poan deus ar mempro,  
 Clenvejo languissant hac ar poan izelly ,  
 Da nep a ia a galon da visitan he ty.

8. Un nombr bras a c'braço da rentin da Doue  
 O cavet he chapel en hon c'homodite.  
 Dre se a gleomp oll contribuin hep mar  
 Da gresquin e inor ha d'augmentin he c'hloar.

9. Hon Salver biniguet en eus savet he dy ,  
 Autre sant Leonard , vis-a-vis d'ho hini ,  
 Dre ma'z oc'h bars en énv en un degre a c'hloar,  
 En eus c'hoant ive e vijec'h voar an douar.

10. Ho chapel hac ho ty so placet excelant  
 Voar eur mene huel , tost d'ar guer a Voengamp.  
 Pa sortier er mes deus a fabougo ker ,  
 E man en tu deo da hent coz Landreguer.

11. Voar eur mene huel ho chapel so situet  
 'Vit bean remerquabl d'an oll belerinet.  
 Trezorio zo enon , digasset deus an énv ,  
 Hac dour celestiel 'vit gouelc'hin hon ine.

12. Eur groas so bet ennon , a voa test mad a se ;  
 Hanvat gant ar gommun cloyten an od voe ,  
 Eur passaj medital , comparet assambles ,  
 Deus an difficulte deus hent ar barados.

13. Nep vo bet tri mintin da visitan ho ty  
 A vo lemet ganoc'h a boan hac a annuy.  
 Pa vouint bet tri c'holo-de da voelet ho treuzo ;  
 A tigorfet dé ar barados gant ho alc'hoec.

14. Oracl ar Speret-Glan , trompil an Aviel ;  
 Ha spont an drouc-sperejo , prezegerien santel.  
 C'houi a dlesoa bean , quent da fin ar bed-man  
 Uzet an treuzo houarn , o tont d'ho pisan.

15. Nep a vo quen hardi , dre eur santimant fall,  
 Da dont d'bo meprisan gant comso disleal ,  
 Pe da laret a ve fableno neve deit ,  
 A clefe an douar fontan diudan o zreit.

15. Ne gredan quet ve den a c'halfe murmurin  
 Enep ar vouirione , m'en ped hac en suppli  
 Len certificajo deus cals ineo mad ,  
 Sinet ha goarantet , attestet gant o goad.

17. En tro pad ar mis Maë e man ar pardonio  
 En ty sant Leonard , hac an induljanço ,  
 Induljanço plenier ha pardon ha merit ,  
 Eurus a he an den a ial di d'o gonit.

18. Deut chistenien devot , deut oll ineo mad ,  
 Deut da sant Leonard abred ha divezat.  
 Enon e man ar mân a venediction ,  
 Mar deut d'o imitan , deus a greis ho calon.

19. Autre sant Leonard , cals a deu d'ho coelet ;  
 Mes na deu quet aoualc'h , an oll a gle donet  
 Lies en o bue da visitan ho ty ;  
 Mar fell dê cacut remed eus pep poan hac annuy.

20. Pa vefet antreet , tud fidel ha christen ,  
 En ilis sant Leonard da ober ho peden ,  
 Sevet ho taoulagat ha c'houi a remerco  
 Merco visibl ha scler a gals a viraelo.

21. Goupallo a houarn , ha eruel limanto  
 Dimeus an dirantet , chadenno ha flahio ,  
 Hac un nombr bras a ve deus a guerden listry ,  
 Merco a delivranç , a boan hac a annuy.

22. Cals a belerinet so goelet er plaç se  
 Noas-troad ha diere'hen en eur bidin Doue ;  
 En corf o rochedo , hep quen habillamant ,  
 Evit trugarecat hac inorin ar sant.

23. Ennon a ve peet ar fatig hac ar boan  
 D'ar belerinet paour a deu a voue galon  
 Da bresantin offranç , gant guir devocion ,  
 D'an Autre sant Leonard , pad deio ar pardon.

24. Da lun ar Pantecost ar Pab a accordas  
 Da dy sant Leonard eur solemnite vras.  
 Piv benac a ief dy gant carante ardant  
 A goelc'ho o ine vel dre ar vadeiant.

25. Ar pouer se oc'h eus diant roue an tron ;  
 Autro sant Leonard , meudeucia ha baron.  
 Al loenet ve clanv a recev an iet  
 O tonet da beurin ar yeod a broduet.

26. An oll vedecinet a renq cedin ho art  
 D'hoc'h œuvro merveillus , Autro sant Leonard.  
 Pa voelet a ve poent arousin an douar ,  
 A tiisset eur glav favorab ha clouar.

27. Ar c'hontrel , pa ouelet re a dour o couean ,  
 A commandet d'an heol da donet da baran :  
 Ar pouer se oc'h eus diant an Eternel ,  
 Autro sant Leonaxd , prelat sacr ha santel.

28. Mar be ret da un den donet da disclerian  
 Un nombr a viraclo en eus gret ar sant man ,  
 A renqfe quent commanç cavet eur min paper ,  
 Ha c'hoas ne ve quet cap d'o disclerian en antier.

29. Cals deus a gaptivet en eus dichadenet  
 Ha reit dé al liberte vel m'an esoa sanet ,  
 Ha gret d'an houarn bras quitaet o izelly ,  
 Laquet en liberte ha quitaet o annuy.

30. Nep a nefe'r bonheur da visitan ho pe  
 Hen a voelfe facil ar breuven deus a se ,  
 Pini so antouret dimeus a chadenno ,  
 evel ma voa Jesus-Christ ive gant an tacho.

31. Mac'harit Angilien , approuvet mad a voa ;  
 Privet deus ar c'herzet ar spaç deus a seiz vla ,  
 Digasset voa d'ar chapel , hac er memes istant ,  
 He defoa ar guerzet miraculusamant.

32. Un den gentil yaouanq a doras he cervel  
 O cocan voar ar pave deus eur prenest huel ,  
 Ma songet voa maro , ha d'eur momet goude ,  
 Goestlet voa d'an tad mad , hac a nefoa ar vue.

33. En eur memes content a voa div leanes  
 Attaquet assambles gant ar paralies ;  
 Pa voeljont quement-man en hon voesjont d'ar sant ,  
 E vejoat rentet iac'h ebars en un instant.

34. Eur buguelic iaouanq, oaget a daouzec vla;  
 Hac eur vroec a oblanç a lar ar memes tra,  
 A vejont rentet dall un tri de pe onsffen,  
 Goestlet a voant d'an tad mad, m'o defoa sclerijen.

35. Un usuiller mechant, clanvat gant ar loures,  
 Evit punition deus he usuilleres.  
 Ar sant en rentas iac'h, dre eur bromesse sur,  
 En amser da donet, da guitat e usur.

36. C'houi so gonir brotecteour vit an oll gaptivet,  
 Hac oc'h eus un nombr bras aneze delivret.  
 Daou vartolot iaouanq deus ar guer a Voengamp  
 O poa bet dilivret bars ar bloa daouzec cant.

37. Ar re man a voa prest da vean punisset;  
 Laquet a voant da lardan en eur c'hoifr alc'hoet.  
 C'houi a eure deze, dre ho craç puissant,  
 Da donet voar o guis d'ar guer deus a Voengamp.

38. An dregont a cbrel lere 'n eil d'eguile,  
 Arc'hoas, ma c'hamarat, man an de quantau a vaë.  
 Hon c'herent, hon mignonet a iel d'en bisitan,  
 Ni n'ellomp evelte monet d'en fleurissan.

39. Autre sant Leonard, hon patron biniguet,  
 Dilivret ac'hanomp a vesq an Durquianet,  
 Ha roet dimp ho craç, ive ho assistanç,  
 Dilivret ac'hanomp ha calmel hon setanç.

40. Ma ve bolonte Doue, tri ferson an dreindet,  
 Hac o modelez divin a vemp c'hoas dilivret,  
 Bep bla lio bisitfemp bete fin hon bue,  
 Hon dilivret eta deus hon gaptivite.

41. Crouer conservateur d'ar bed ha d'an astro,  
 Lumier ar barados, an douar, an envo,  
 Nin a recommand dac'h hon c'horf hac hon ine,  
 Ne c'houlomp quet mervel mesq an dud disvade.

42. Quen buan voint deut dy, an dra man so certain,  
 'Vel ma teufe aman dre'n ær eur goumoulen.  
 Dre ar pouar divin deus ar sant biniguet,  
 Da renti an hommaj vel m'o doa prometet.

43. Ar bobl pa arrichont voa ennon oll stonet  
O voelet an daou man en eur c'houffr alc'hoet;  
Hag ar c'hleyer da son, querquent a gommanças  
Da c'hervel an oll dud da velet ar miracl bras.

44. Cleyer 'nItron-Varia guirsicour biniguet  
Gant re sant Leonard o deus ive sonet.  
Da guentan en eus sonet ar c'hloc'h bras  
Da inorin ar sant deus eur miracl quen bras.

45. Casset oand d'ar chapel gant ar procession  
Da drugarecad ar sant deus a greis o c'halon,  
D'en curunin a fleur ha dimeus a lore,  
D'en bezar rentet'n o bro, preservet dé o bue.

46. Cals a bresancho all rejont d'ar chapel-man;  
Mes, altas! ma speret na n'e quen vit riman.  
An oferen guentan, voar gann so bet laret,  
Evit dont da inori sant Leonard viniguet.

47. Euz eur miracl quen bras dre e bedenno gret,  
D'o bezar preservet a douez ar baïanet.  
Aboe continuer bop eiz de d'e laret  
En inor da sant Leonard viniguet.

48. Homan so'r seul chapel dindan ar firmamant  
Ve canet'n oferen bemp heur da inori ar sant,  
Pehini en eus gret un nombr a viracle  
Da guement n'hon adres dean a greis o c'halono.

49. C'hoas oc'h acompagnet gant eur mignon sincer  
Hag a doug an hano dimeus a sant Salver.  
E man o fortret ebars ar chapel en heur bresant,  
Dre ma n'em guerontho daou a garante fervant.

50. Ar roue Clovis, un de, e chasseal er c'hoat,  
Hac he itron gantan, en eur c'haros quiped mad,  
Hi en em gavas clanv evit guenet he mab,  
Hac a reas d'ar prinç cals deus a galonnat.

51. Mont a ra d'an daoulin ennon presentamant  
Evit goulen graço digant Doue hac ar sant.  
'N em recommandin a res a galon da Doue,  
Da breservin dean an eil hac eguile.

52. Autro sant Leonard apparissas dean  
 Hac a res oræson a galon dirazan,  
 Hac en doa he c'houlen dirac Roue an tron;  
 Dre ma voa den santel, leun a devocion.

53. N'on quet evit laret an nombr deus ar groague  
 En eus bet dilivret a boan a vugale;  
 Darn dimeus aneze rentet agonisant;  
 En eus laquet o freus da recev badeiant.

54. Ar pouer se oc'h eus digant an Eternel;  
 Autro sant Leonard, hac ive sant Salver.  
 Ma vijac'h c'hoas pedet, a rajac'h hirie an de  
 D'an oll ar memes graç, gant liberalite.

55. Dimeus an oll sænt bras eo c'houi an daou dad!  
 Obtenet dimp ar c'hraç da vervel en stad vad;  
 Ha pedet evidomp hac an de hac an nos,  
 Ha lequet ac'hanomp en hent ar barados.

FIN.

Ar c'hantic-man so gret gant Fanch ar MAREC  
 deux a lomikel Goengamp; traduitset divoar an  
 hini gallec en brezonec, ha divoar renseigna-  
 mancho clevet gant an dnd ancien ha divoar buez  
 ar sant biniguet.